

**SANCTA MARIA.**



**ORA PRO NOBIS.**

# CANTIC SPIRITUEL

*En enor d'an Itron Varia a RUMENGOL, ur  
plaç santel meurbet demeus a escopti Querne,  
& Pares Hanvec, tost d'ar Faou.*

*Var ton : Glac'har ar Verc'hes.*

**T**AD, Mab, ha Speret-Santel, tri lerson en Drindet,  
Me ho ped, a greiz calon, da rêi din ar speret  
Da gouposi ur C'hantic d'ar Stereden brillant,  
Ar Fourdelisen gaëra demeus ar firmamant.

Ho Merc'h eo, Tad Eternel, ar Verc'hes beniguet,  
Pried d'ar Speret-Santel, Rouanez an Alet;  
Dreist an oll graguez eurus hi a zo cavet din  
Da veza Mam da Jesus, hon Redemptor divin.

Pa deuan da gonsideri, Guerc'hes sac'r ha tener,  
An enor, hac ar gloar vras oc'h eus a bep amzer,  
En em gavân goal dister d'ellout o disclêria,  
Bemedoc'h-hu, Mam santel, a deufe d'am asista.

Mes leun a fisianç ennoc'h, e meus antreprenet  
Da bublia ho praser etquez ar Vretonet,  
Ha disclêria ar graçou zo accordet d'an oll,  
Dre c'hraç Jesus, hon Antrou, én Ilis Rumengol.

E peh lec'h eo enoret MARI, hor Mam zantel,  
Hac ec'h exauç gant joa vras nep zo dezi fidel;  
Bez e deus certen plaçou, pere, dre e fuisanç,  
E lec'h ma ro e graçou gant mui a abundanç.



Hep offañ nep plaç santel d'ar Verc'hes batissel,  
 En Escopti a Guerne, er barres a Hanvec  
 Eus un Ilis consacret en gloar hac en enor  
 Da Rouanez an Alet, güir Vam d'hon Redemptor.

Güir dud devot d'ar Verc'hes, m'ho ped, diredit oll,  
 Deut gant laouenidiguez da Ilis Rumengol,  
 Da supplia Mam Doue da rei dêc'h ar yec'het,  
 Ha da zivoal hoc'h ene diouc'h laç an drouc-speret.

Mar dé blesset hoc'h ene memes gant ar pec'het,  
 Deut d'ar zourcen a vue hac ho pezo remed:  
 Gouennit ouc'h Mam Doue ar graçou necesser,  
 Ma ellot chench a vue, na vezot mui pec'her.

Mar deo ho corf attaqet gant an affliction,  
 Deut da Ilis Rumengol gant güir devotion;  
 Ur plaç leun a viraclou, dre c'hraç ar Verc'hes vad;  
 Mar e sedit a galon ho soulajo timat.

A bêvar c'horn eus a Vreiz e teu pelerinet  
 Da bedi Mam hor Zalver, gant ur galon barfet:  
 Eus a escopti Leon, Treguer, Guened, Qerne  
 E teu an oll dud devot da veuli Mam Doue.

Dre'r brud eus ar miraclou a ra güir remed tout,  
 Dre c'hraç Jesus, hon Autrou, o deus an oll galloud;  
 Ma teu ar belerinet d'e Ilis qer divin  
 Da ober an dro dezi, memes var o daoulin,

Un nombr bras a viraclou a ra ar Verc'hes vad  
 En Ilis a Rumengol dre c'hraç Jesus, e Mab:  
 Dre e zicour ha madelez e meus antreprenet  
 Discléria lod anezo etouez ar Vretonet.

Ar Verc'hes a Rumengol, er barres a Hanvec,  
 E devez grêt a nevez ur mirac' caer meurbet,  
 An oll a zo estonet oc'h e consideri,  
 Ne zeus netra impossibl dêc'h-hu, Guers'hes Vari.

A dost-dei, ur c'hrouadur, bars en un oad distet,  
 Pa voa'r velin o vala, a goezas er rivier;  
 Gant an dour e voa ruillet, ma zeas e toull ar bal,  
 Ma sonjet a voa flastret, allas! gant an dour mel.

E dud, carguet a c'hlac'har ha nielconiet oll,  
 Er goestlas bars eñ instant da Verc'hes Rumeñgal;  
 MARI, leun a garante, dre e dorn beniguet  
 A recours e vuez, erveas e voe tennet.

Evit rei güir desteni deus ar miracl caer-ze,  
 E voe casset ar buguet da Rumeñgol neuze,  
 Laquet er procession, gant an ur c'houlouen,  
 Evit renta güir homach d'ar Verc'hes souverain.

A dost d'ar C'hastel-Nevz e zeo din rapportet  
 E deus grêt güir Vam Doue ur miracl caer meurbet:  
 Dre an fan ur tieguez voa prest da berissa  
 P'o deus pedet ar Verc'hes da zont d'o asista:

An ozañ h, güir servicher d'ar Verc'hes beniguet,  
 En em stringas d'an d'abulia d'e fed gant respect:  
 MARI, leun a garantez, a zigassas glo bras,  
 Hep en devoe'neb offang: ar tñ prest a vougar.

Ama e zñ c'hoas charmet, Guerc'hes, Mam a druc,  
 O'compren ho carantez evit ho pugile;  
 Disquezet oc'heus ho pñvoar d'ar c'hrouadur nab'blat;  
 Oc'h ober ea e andrèt ur miracl ar c'haera.

Dre ur miracl ar brassa, ur c'hosty o coemq,  
 Ur c'hrouadur o tremen en em gav diudanna;  
 Ar vein a goez d'o dezàn, ma sonjet voa lazet;  
 C'houi deuas d'en asista; Rouaner an Alet:

E dud i gommang'etial: Guerc'hes, deat d'hor stour,  
 Savetai'hor c'hrouadur, eñ oc'h ma hou recouf;  
 Ar vein a voe remnet, ha dre c'hrac ar Verc'hes  
 E voe c'aret dizrujer, dispoñ, leun a vuez

Mari, hor Mari souveren var vdr ha var d'ouër,  
 A denn e servicherien a zañjer, a c'hlaç'har;  
 Nomb'r bras a vartoludet e deveus preserret.  
 Prest bras da goll o buez, pa deus-hi invoqet.

Nomb'r bras a vatimanchou'e deveus preserret,  
 Hac an dud, hac ar madou, dre e c'brac beniguet.  
 Ha bagou, ha goberi, e creiz an tempest bras.  
 Pa bedet hor mami MARI, a obtenc prest grac.

C'hoas ur c'hrouadur distet a escopli Leon,  
 A voa coezet er rivier; d'edud pehes spouron!  
 Claqet gant calz a c'hlaç'har, pa o deus invoqet  
 Ar Vere'hes a Rumeugol, en instant voe cavet.

Pa g'vijont ar c'hrouadur, hac en prest da vervel,  
 Ec'h implorjont a neve MARI, hor Mari zantel,  
 Da rei dezàr var vuc dre e grac beniguet,  
 Dirac ar gompagnunes o fedon zo clèvet,

Un den a c'houlet Leon a gollas ar c'herzet;  
 Zo bet eiz mis o vate var ben diou var loaec,  
 Grèt pris gant ar medecin evit trec'hi e char.  
 Memes a rez deus e c'hlin, va Doue peiz glac'har!

Unnosvez en e vele e teuas soueh dezà  
 E voa bet e Rumeugol guechal o pardona,  
 Ha ma santre'u e galon an dezir qen'ardant'  
 Hac ur guir devotion d'ar Vere'hes oll-buisant.

Guir Vam-Jesus hon Autrou, eme an affijet,  
 Va sidoret em p'paniou, Rouañez an Alet,  
 Ha me rei en doneson ar c'hæra zo eni zy  
 Da gass da zelt ho Pardon evit hoc'h enori,

MARI, leon a gavaritez, a bedas e Mab'ger  
 Da exauci ar bedon a rê e servicher;  
 Receo' ar c'herzet dre ur g'hir grac dreis oll,  
 Bet eo bet out'ha p'paniou en Rumeugol.

Ne ouffet get niveri , nac ive discleria  
 Ar miraclou infinit a ja ar Verc'hes-mà ;  
 Neb e zo güir Gristenien demeus a galon vad ,  
 Hi a brezant hor peden da Jesus-Christ e Mab.

Qen a gorf , qen a ene , qement zo afflijet ,  
 Deut da' llis Rumengol gant ur galon barfet ;  
 Pedit , invoqit eno hor Mam zantel MARI ,  
 Ha reuoneit d'ar pec'het evit plijout dezi.

Sant-Thomas ha Sant-Bernard , daou servicher fidel  
 D'ar Verc'hes , Mam da Zoue , gant carantez santel ,  
 O daou deu d'hon assuri gant güir fidelite  
 Dont d'e fedi a galon , hac e zimp oll d'an êe.

Courach eta , Christenien , gant enor deut oll  
 Da velet hon advocades da llis Rumengol ,  
 En em roit corf hac ene da servicha Doue ,  
 Ha da bedi ar Verc'hes ar vest eus tro pue.

Qement e zeo enoret ha caret gant Doue ,  
 Ma permet dezi ober hervez e bolonte ;  
 Qement graçou na vertu a zisqen var ar bed ,  
 A dremen oll dre zaouarn ar Verc'hes beniguet.

E mis cost , ar bemzecvet , an devez ma pignas  
 En Evou gant an Alet , gant solemnite vras ,  
 E teu ah oll dud devout , gant güir devotion  
 D'an llis a Rumengol da c'hounit ar pardon.

Un Doue oll-galloudus a bermet dre e gras  
 Ma zeo da Zul an Drindet e mà ar Pardon bras ;  
 Ar bobl eus a Vreiz-lzel , a veler an deiz-se  
 O tonet da Rumengol d'enori Mam Doue.

En deiz-se e c'houdezer Induljançou plenier  
 En llis a Rumengol e ty Mam hor Zalver ,  
 Oc'h ober , gant güir glac'har ur gôvession vad ,  
 O recee communion , pa vezer e güir stat ,

D'an eizvet a guengolo, gouel e Nativite,  
 E zeus ar memes pardon bars er plaç santel-se.  
 Memes heb Gouel ar Verc'hes a zo epad ar bloa  
 E teu an oll dud-devot d'e bisita gant joa.

Er solemnite santel eus a sul an Drindet,  
 Qement a ya d'ar Pardon a zo oll ravisset,  
 O velet Jesus hon Autrou ebars er Sacramant  
 O c'hortos hor e'halonou gant carantez ardant.

Deut oll eta, Christenien, deut oll a vandennou  
 Da Rumengol da bedi Mam Jesus hon Autrou;  
 Assuret oc'h da veza gant Doue pardonet,  
 Mar bec'h guir servicherien d'ar Verc'hes benignet.

Renoncit d'ho pec'hejou hac en em anrollet  
 Ebars er Breuriezou a zo instituet  
 Da enori ar Verc'hes, evel ar Kozera,  
 A rent d'hor Mam souveren un enor ar c'haëra.

Ne vangit qet da laret bemdez ur Chapelet,  
 Pini eo e c'hurunen, un dizenez hanvet;  
 Nep a zeui d'e recita gant carantez barfet  
 A vezo guir servicher d'ar Verc'hes benignet.

Itron Varia Rumengol, pedit, me ho suppli;  
 Evit an oll dud devot a visitañ ho ty;  
 Chasseit an droue-sperejou hac o dentation,  
 Ha presentit da Zoue bemdez hon oréson.

Guerc'hes glorius Vari, Mam santel da Zoue,  
 Pa vimp en heur hor maro, recevit hon ene;  
 Ha dre ho torn benignet cassit-hi da repos  
 Ha da veuli an Drindet e gloar ar Baradoe.

**FIN.**

---

**ORÉSON DEVOT D'AR VERC'HES.**

Var ton : *Un desir bras a meus hivisiqen.*

**M**B ho salud, MARI, guir Rouanes eternal,  
 Dre ar memes meuleudi evel an **Æl Gabriel** :  
**O Guerc'hes glorius ! Mam santel da Zoue,**  
 Pedit ho Mab Jesus evidomp nos ha de.

Merc'h an Tad Eternal, a bep costez enoret,  
 Templ ar Speret-Santel, Rouanes ar Guerc'heset ;  
 Mari, Advocades evit ar bec'herien,  
 Pedit evidomp oll an Drindet souveren.

O guir Arc'hi Alliang ! a behini eo ganet  
 Gant calz a eloqanç hon Redemptor beniguet,  
 E peb anzer pedit evit ar bec'herien,  
 Ha recevit bepret hoc'h oll servicherien.

O Stereden ar môr ! chasseit an devalijen,  
 Hac obtenit deomp oll ar peoc'h hac ar sclêrijen ;  
 Dre ho torn, Mam santel, chasseit divar hon tro  
 Hon adversour cruel en heur eus ar maro.

Plijet gueneoc'h, Guerches, accordi deomp ar graçon  
 Da c'hench hor goall vuez, hac heulia vertuziou !  
 Mari, arantezus evit ho pugale,  
 Pedit ho Mab Jesus da receo hon ene.

Squillit lod eus ho leas, ô Mari mam da Zoue,  
 E fin eus hor buez evit guelc'hî hon ene ;  
 O sourcen an oll joa, c'houi eo ar bouqet ros  
 A die hor fleurissa ebars er Barados.

FIN.

---

**E Montroulez, eus a Imprimeri LEDAN.**